

YF_0110_Kloareg Koad-an-Noz

Buhez an den war an douar
A zo karantez ha glac'har !!!....

Dalc'h eta ma gwazig dour, gand da hiboud tener,
Da frealzin ma c'halon, pa 'z on erru er ger;
Gra din debrin hep anken ar bara am-eus bet
Digand an den pinvidig savet war lein ar bed.

Gwechall pa oa din ur vamm hag un tad da gared
Me na ouien ket neuze petra oa boued klasket
Ur gwele mad da gousked, paket em palennou
Piou a oa ken evuruz nemed sent an nenvou.

Goude ur pennadig skol e lavaras ma zad:
"Me a gred din e rafe Yannig ur beleg mad
Da Landreger ez aio da ober e studi
P'am-bezo graet kement-se gand joa vraz e varvin."

Gwelloc'h e oa ganin-me chom er ger da c'hoari,
Da bignad war ur garreg, ha da heulian Mari
Da zelled euz Menez-Bre ha chapel Sant-Herve,
Da zaspugn mouar-garz da ober gwin nevez.

Un deiz ma oamp hon unan o vesan hol loened
Mari din a lavaras: "Yannig, me am-eus klevet
Da dad, da vamm o lared e kaso ar person
Ac'hano da Landreger, rannan a rae ma c'halon!...."

E-pad an noz na gouskis, na raen nemed gouelan
Un deiz warlerc'h pa zavis, ma mamm din a dostas:
"Warc'hoazh kentan, ma mabig, da Landreger ez i
Beleg e rankez bezan, ha mond a rankez di."

Setu me o vond neuze euz eeun da Banfourbi
Hag em-eus kavet eno ma c'hoarig lez Mari
Pegen euruz e oam ni, bugale daouzeg vloaz
Mari a daolas warnon ur zell an teneran ! ...

Dalc'h breman eta, Yannig, dalc'h ar vedalen-man
Ha ped war-n-hi ar Werc'hez, ma tigouez din chom klanv.
Laka e-barz da gerc'hen medalen Rumengol
Honvez eo al lousaouen a ro yec'hed d'an oll

An deiz warlec'h a erruas, hag e renkis neuze
Kuitaad ma zad ha ma mamm, Koad-an-Noz, Koad-an-Ae
Ha moned da Landreger da zeskin ar galleg,
Al latin hag ar gregach, ankouaad ar brezhoneg !...

E-pad eiz vloaz ma chomis er skol el Landreger
E teuen diou wech ar bloaz da weled ma zud ker
Mond a ren da Banfourbi evid gweled Mari
He furnez a oa ken braz! Doue a oa ganti.

Mond a rezomp un devez da weled Menez-Bre
Da weled Menez Gwenn-C'hlan hag hini Sant Herve
Hon tadou hag hor mammou a oa ganeom ivez
Pegen buan an amzer er chapel-ze !!!...

Me em zao war ar Menez a lavaras neuze:
"Gwenn-C'hlan, barz brudet e Breizh, pelec'h, pelec'h out-te
Un deiz bennag a erruo, er bez-me a yelo
Pelec'h eman da hini pevarzeg kant vloaz zo?

Dirazon eo bet savet, harpet war e delenn
Ha diouzin en-deus komzet, komz a reas evel-hen:
"N'en-deus den war an douar e-barz an devez-man
Hag a hellfe lavared pelec'h eman bez Gwenn-C'hlan.

Gwir mad eo, ma relegou war dosenn Menez-Bre
Em-boa gwechall douaret, ha me c'hoaz e buhez
Hogen te ganet barzig un deiz a vezo barz
Az-pezh sonj euz a Wenn-C'hlan, kuzet dindan ur c'harz."

Ha pa oe graet ma studi, e teuis c'hoaz d'ar ger
Da c'hortoz bezan kaset prestig d'ar seminer
Laret e oa gand Doue na vijen ket beleg
Pelloc'h evid na sonjen er ger e oan chomet

Ar vosenn a zo didruez, gouzoud a rit ervad
Lamet he-deus diganin ha ma mamm ha ma zad
Hag an hini a garen, ho! pegen braz glac'har!
Ma Doue, deuit da harpan an den war an douar.

Neuze eo deuet em spered moned da Rumengol
Ar Werc'hez a zo eno a ro yec'hed d'an oll
Me ya, gand ma medalen, da vro Sant-Gwenole
Ha ma dorn d'ar pinvidik a astennin bemdeiz.

Erru dreist Menez-Arre, a-bell em-eus gwelet
Bro an aotrou Graveran, gand Kerneviz karet
Pegen kaer e oa Krozon, parrez an den santel
A zo marvet e Kemper, n'en-deus ket c'hoaz gwell bell!

Dirazon Landeveneg em-eus gwelet neuze
Em zu kleiz ar Menez-Hom, a zo breur da Venez-Bre
Sonjal a ren e ker Ys, e Daoulaz hag er Faou
Ha Rumengol a welis war-lez Koad-ar-C'hranou

Goude peden ar salud, setu me en Hanveg
Er barrez en-deus bevet gwechall c'hoaz ur c'hloareg
Gwelet em-eus al lochig pelec'h e oe ganet
Evuruz ez eo hirio; ra vo Doue meulet!

Setu me erru breman; raktal am-eus klasket
Skeudenn ar Werc'hez Vari gand he sae alaouret
Chomet ez on en noz-se gand mamm ar gwerchezed
Breman ez an da lared an traou am-eus gwelet

Da hanternoz an iliz a oa ken skler hag an deiz
Ar seiz sant a Vreizh-Izel a welan goude-se
Setu ar roue Gralon, sant Gwenole gantan
A bep tu d'an eskop gwenn, an aotrou Graveran

Leun eo ar santual a zent, a zentezed
A eneou evuruz an iliz a zo karget
Eneou ar purgator deuet a-greiz ar flammou
Evid pedin ar Werc'hez da gaoud truez outo.

Sant Kaourintin en e zao en-deus komzet neuze
Ho! Pegen kaer prezegenn da domman an ene!
Lavaret en-deus dezo pedin evid ar vro
Ha Mari war Vreizh-Izel he bennoz a skuilho

Kerkent ez int distroet ouc'h ar Werc'hez Vari
War ho taoulin an oll zent a zo aet da bedin
Da bedin hor mamm santel, ar Werc'hez vinniget
Da zerc'hel bepred ar feiz e-touez ar Vretoned

O 'fedenn peure'hraet ganto, ez eo savet an oll
Hag an teir zro d'an aoter a reont gwel zeol
Neuze peb a c'houlaoenn ganto am-eus gwelet
Ur c'han euz ar baradoz am-eus ivez klevet.

Gralon a oa o tougen ar groaz er penn kentan
War e lerc'h sent Breizh-Izel a glever o kanan
An nor dal a oa digor, mond a reont er-mez
Chomet ez on ma-unan eno gand ar Werc'hez

Me grede e oan erru en nenv dirag Doue
Pa glevan an anjeluz da zigerin an deiz
Neuze diwar ma daoulin me a zo prim savet
D'an aoter vraz a galon an teir zro am-eus graet

Da dreid ar Werc'hez Vari em-eus ivez poket
Hogen, ho! Pebez burzud! Diouzin he-deus komzet
"Yannig, servicher feal, pehini a garan,
Roet zo din evidout ur c'hraz euz ar gaeran.

Jesus, ma mab, da Zalver, en-deus din lavaret
E tremeni da vuhez en ur c'hoz ti kouezet
N'az-po evid gwele nemed ur bern deliou
Hag a-dreuz toenn da di e weli an nenvou.

Na vezo dor na prenestr war an ti az-po,
Ha da damm boued a glaski beteg eur ar maro.
Hag ur wech graet kement-se, sell, kaeran kurunenn
Me ma-unan e teuin d'he lakaad war da benn."

Ho pegenn mad eo Mari, setu me frealzet
Goude-se d'ar relegou gand joa em-eus poket
Koulz ha da gorv Sant Silven, digaset gand ar Pab
Neuze diouz iliz Mari em-eus renket pellaad.

Ha breman pa 'z on erru e-barz e Koad-an-Noz
Da glask ma zammig bara kent mond d'ar baradoz
E c'houlennan evidoc'h ar c'hraz, ma breudeur kaez
Da vezan oll selaouet pa bedoc'h ar Werc'hez

Ken.

Mil meuleudi d'ar Vreizhiadiz
A zalc'h o bannier stard hag uhel
Enep darn euz o c'henvroiz
A ra fae war gwerzou Breizh-Izel

An drizeg a Eost 1857

Kloareg Koad-an-Noz